


O STEREDENN VA C'HALON




Pa zi - le - zis bro va c'ha - vell, Pe - tra



oan - me ne - met ur bu - gel, Ka - set - di -



ga - set gant mor hag a - vel ? O ste -



re - denn va c'ha - lon !

Pa zilezis bro va c'havell,
Petra oan-me nemet ur bugel,
Kaset-digaset gant mor hag avel ?
O steredenn va c'halon !

Poaniou kriz am eus diwasket,
Met da skeudenn he deus lugernet
Dirak va spered, hag em eus stourmet,
O steredenn va c'halon !

Ha plijadur 'm eus bet ivez,

Meur a vignon ha meur a vestrez ;
Met mann ne gavis par d'az karantez,
O steredenn va c'halon !

Ha davedout pa zistroin,
E Breizh-Izel, eur gwaz e vezin,
Leal ha mibin, nerzhus ha lirzin,
O steredenn va c'halon !

Roparz HEMON.

Hervez un ton a Vro-Gembre.